




**KENVREURIEZ AR BREZONEG**

KATEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG.

Eizved bloavez.

(45,46,47,48,49)

Niverenn 48

Taolenn:

1)Peseurt yez, peseurt doare kan implijoud evid an interamanchou ?

2)Overennoù: evid an Iliz p.1

evid Breuriez ar Feiz. A. p.6

B. p.8

3)Pater hag ave kosa e brezoneg. p.18

4)Studiadenn werr-gand F. Falc'hun. p.23

5)Buez ar ZEnt: e skeud ha war roudou

Mikael an Noblêtz.

p.26

Evid kement tra a zell ouz "Kenvreuziez ar Brezoneg" (Koum.25 lur)  
her goulenn digand:

An Aotrou Job SEITE, Skol an Aod, 29249 GUISSENH

CCP 1738-66 RENNES

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

1)Levr Overenn: 35 lur

2)Komz Doue en overenn levr T 30 lur

3)Komz Doue en overenn. Levr A,B,C pebhini 20 lur

4)Ar briedelez 8 lur

5)An Nouenn 8 lur

6)Cantiques du diocèse de Quimper et de Léon .... 35 lur

7)Kroazioù keltieg (Bleun Brug) 3 lur

8)Overennoù evid an Anaon. 8 lur

9)Overennoù en enor d'ar Werhez 8 lur

10)Sakramant ar Vadiziant 8 lur

11)Enoc'h Arden. 8 lur

12)Overennoù en enor d'ar zent ha d'ar zentezed 10 lur

+ mizou kas.

Troidigeziou aotreet da arnod evid-an eskobti a-berz an Aotrou  
F. BARBU, eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 15 a viz kerzu 1977.

Visant FAVE.

PESEURT YEZ, PESEURT DOARE-KAN, IMPLIJOUD EVID AN INTERAMANCHOU ?

Fañch d'an Aotrou Person.

Eun dra zo, aotrou person, hag am-boa c'hoant da houlen diganeoh, abaoe eur pennad a zo.

Me a garfe pa zeuy ar mare ! anzer 'zo ! beza interret e brezoneg, gand tra pe dra e latin marteze. Petra 'zoñjit ?

Gweled a ran ez eus tud hag a ziviz war o zestamañt e pe zoare e fell dezo beza interret: e brezoneg penn da benn... e latin ha gand kan gregorianeg h.a. Hini pe hini a ya pelloh: toud pe netra e brezoneg penn da benn, ha ma ne fell ket d'ar veleien asanti, kas neuze ar horv d'ar vered heb tremen dre an iliz. An dra-se a gavan eun tammig kalet ! Petra 'zoñjit ?

Respont an Aotrou Person.

N'on ket laket an disterra nehet gand ho lizer evid ar pez a zell ouzoh-hwi. Lakom e vefen c'hoaz euz ar bed-mañ, ha person er barrez pa zeuio Doue d'ho kolver. Ma teu ho tud da houlen lida an interramant e brezoneg e vo grêt rag gouzoud a ran e oar brezoneg an darn vrasa euz an dud a zeuio d'an iliz, lakom an oll zoken, rag siwaz ! ne vez ket stank ar re yaouank en interramanchou.

Me a yafe buan awalh pelloh zoken. Lakom e teufe amañ da interri ho mab kaer, ganet e kêstez Paris ha ne oar ket ar brezoneg, ma teufeh c'hwi da houlen e vefe greet al lidou e brezoneg, her grafen a galon vad, peogwir eo ar brezoneg yez pemdezieg ar re a vefe en iliz. Kompren a rit, Fañch, an ofis en iliz a zo grêt evid sikour an dud da bedi ha lakaad da bedi an dud a zo war al leh, hag evel just ar yez da implijoud eo yez an dud a zo en iliz.

Ma teufe euz Zaoz pe eur Zaozez da vervel en unan euz or parrezioù e-doug an nañv e hellet kredi n'eo ket e saozneg e vefe greet al lidou interramant dirag eun ilizad tud ha n'ouzont ket e saozneg. Eun ofis en iliz a dle beza gwirion.

Ouspenn e rank ar gerent dond da houlen ma ve grêt an interramant e brezoneg, da vianha er parrezioù el leh n'eur ket boaz d'hen ober. A hend all e hell ar beleg beza tapet fall.

- "Va zad a zo maro, deuet on da houlen diganeoh, Aotrou Person, ober interramant gantan.

- "E brezoneg e vo grêt ma karit, ho tad a gare ar brezoneg hag an dud a vo en iliz a oar ar brezoneg.

- "O kement-se ! ni n'om ket tud diwarlerh ! Galleg eo a fell deom, evel ma vez greet e kêr."

Ha pa vez eun testamant ? Diêsoh ar gudenn da zirouestla. "Ne fell din nemed brezoneg, nemed galleg, nemed latin, nemed kan gregorianeg....

Awechou e sav tabut, awechou zoken ez eus bet grêt prosez d'ar veleien o veza n'o doa ket sentet ouz an testamant, med al lezvarn e-neus disklriet didemall ar veleien, dezo eo divizoud.

Dezo eo divizoud e pe zoare e vo an ofis ar frouezusa hag an talvoudusa evid ar bedenn. N'eo ket diouz o faltazi avad o-deus da zivizoud, na diouz an êzament, med diouz ar wirionez. Testamant pe get, n'eo ket gand an hini maro emâ an disentez.

Ar yez (pe ar han) a zo e servij al liderez hag ar bedenn.  
ha n'eo ket al liderez e servij eur Yez pe eun doare kana.

Ma vefe dalhet kont en or parrezioù euz ar mennoziou-se e nefe  
ar brezoneg muñh a blas en on ilizou. Lavared a heller: perag reuze e vez  
lidet interrampañchou e galleg dirag ilizadou tud hag a zo ar brezoneg o yez ?  
Sklêr eo nemañ ket tamm ebed a du. Eur rebech a rankan da ober: n'eo ket  
stank awalh ar gerent a zeu da houlenn brezoneg evid interrampañchou o zud.

Hag ar re a gav gwelloc'h e vefe kaset o horv war eeun d'ar vered,  
ma ne asent ket ar valeien ober an obidoù e brezoneg ? Pe e kredont da halloud  
ar bedenn, pe ne gredont ket. Aze emañ an dalh.

K.a.B.

ABERZ KENVREURIEZ AR BREZONEG

NEDELEG LAOUEN

HA BLOAVEZ MAD

DEOH OLL.

*Ra vo sklerijennet a beoh, a levenez, ho labour hag ho puez.*

OVERENNOU.

EVID AN ILIZ: (1)

Pedenn an digor: Aotrou Doue, dre an emgleo nevez savet gand an Aotrou, Krist,  
e lakit heb ehan da zevel evidoh eur bobl santel,  
heb kemm ebed etre gouennou hag harzou  
unanet ma'z int gand ar Spered Santel.

Grit d'hoh Iliz beza fidel d'al labour fiziet enni,  
mond atao war araog gand famill mab-den,  
ha beza eviti evel ar goell hag an ene,  
e doare ma tevio famill an dud  
da renevezi en Aotrou Krist  
ha da zond da veza famill Doue

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh  
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

War ar provou:

Digemerit, Aotrou Doue, gand madelez  
ar provou a ginnigom deoh  
ha roit d'hoh Iliz, ganet euz kostez digor an Aotrou Krist  
maro war ar groaz  
kavoud bepred e sakramant an Aoter  
ar zantelez a dle beza en o buez  
evid beza din euz an hini e-neus he zavet,  
Jezuz Krist or Zalver..... Amen.

Goude ar gomunion:

Aotrou Doue,  
bremañ p'on-eus kavet eun nerz nevez  
e sakramant ho mab  
e reom ouzoh ar goulenn-mañ:  
grit ma taolo frouez, labour hoh Iliz,  
ma ne haouezo morse da brezeg d'ar beorien  
ar zilvidigez en he far,  
rag o galvet ho-peus gand ar re genta  
da vond d'ho rouantelez.  
Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

EVID AN ILIZ (II)

Aotrou Doue,  
 c'hwi hag ho-peus divizet, e vefe astennet  
 dre ho Providañs, rouantelez an Aotrou Krist  
 dre ar bed a bez,  
 ha galvet an oll dud da gaoud perz er zilvidigez,  
 Plijet ganeoh ma ve hoh Iliz  
 ar zakramant euz zilvidigez an oll  
 ha ma teufe da veza diskleriet e buez an dud  
 mister ho karantez  
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou  
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
 a oll viskoaz da virviken.

Aotrou Doue trugarezuz,  
 taolit eur zell war provou ho pobl santel,  
 ha grit, dre vertus ar zakramant-mañ,  
 ma teufe an oll dud a gred ernoh, pobl dibabet ganeoh,  
 da veza eur velegiaj roueel  
 eur vroad santel, o vond bepred war gresk.  
 Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.

Aotrou Doue,  
 c'hwi hag a ro bevañs ha nerz d'hoh Iliz,  
 dre ar zakramañchou  
 Grit deom, goude beza bet renevezet,  
 gand ar bara euz an neñv,  
 beza, en eur zenti ouz kelennadurez ar garantez  
 eur goell a vuez hag eur benveg a zilvidigez  
 evid ar bed.

Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.

oooooooo

AN ILIZ.

Al Iennadennoù.

- 1- Iz... 56/ 1,6-7 ....levr A.p.92
- 2- Iz... 60/1-6..... levr T.p.19
- 3-Ezek.34/11-16... levr C.p.44
- 4-Ozea 2/18b-17,21-22 levr.B.p.59 (pe gwec'hezed)
- 5-Sof...3/14-18 .... levr C.p.5
- 6-Ober. 2/42-47... levr A.p.42
- 7- I Cor. 3/9b-11,16-17 // levr T.p.84
- 8- I Cor. 12/3b-7;12-13 levr T.p.76
- 9-Efez. 1/3-14 ... levr B.p.73
- 10-Efez. 2/19-22 .Gweled amañ warlerc'h.
- 11- I Pèr 2/4-9 ... levr A.p. 48
- 12- Disk. 7/2 4,9-14. Levr T.p.113
- 13- Disk. 21/ 1-5a...Levr C.p. 35
- 14- Disk. 21/ 9b-14 ... Gweled amañ warlerc'h. Levr C.p. 37

10-EFEZ 2/19-22:

*Ni'zo kemroiz ar zent, euz famill Doue.*

Iennadenn euz lizer Sant Paol d'an Efezianed:

*Va breudeur,*

- 19-N'hoh mui tud estren na tremenedi,  
Bez 'ez oh kemroiz ar zent, tud euz famill Doue.
- 20-Laket oh bet er zavadur e-neus da ziazez  
an Ebestel hag ar Brofeted,  
ha da vên-korn, Jezuz Krist e-unan.
- 21-Ennañ eo e teu ar zavadur en e bez  
d'en em stumma ha da greski  
beteg beza eun templ santel en Aotrou.
- 22-Ennañ, c'hwi ivez ho-peus ho plas er zavadur  
a zeu da veza, dre ar Spered,  
eun demeurañs a Zoue.

14- DISK. 21/ 9b-14:

Ar Jeruzalem nevez.

Lennadenn euz levr an Diskuliadur:

- 9b- Unan euz ar zeiz êl a lavaras din:  
"deus, diskouez a rin dit ar plah-nevez, pried an Oan."
- 10- Va dougen a reas a spered war eur menez bras hag uhel,  
hag e tiskouezas din ar gêr xantel, Jeruzalem,  
o tiskenn euz an neñv euz a gichen Doue.
- 11-Skedi a rea, euz sked Doue end-eeun,  
tenna a ree he sked d'eur mên a briz,  
heñvel ouz eur mên yalp, treuz weluz evel strink;
- 12-E Endro dezi eur voger-zivenn uhel ha ledan,  
daouzeg dor he-devoa,  
ha dirag an noriou daouzeg êl,  
hag anoiou skrivet engravet warno,  
anoiou daouzeg meurriad mibien Israel.
- 13- Warzu ar zav-heol, teir dor,  
Warzu an hanter-noz, teir dor,  
Warzu ar hreisteiz, teir dor,  
warzu ar huz-heol teir dor.
- 14- Mogerioù divenn kêr o devoa daouzeg diazez,  
skrivet warno daouzeg ano, daouzeg abostol an Oan.

oooooooooooooooooooooooooooo

EVID AN ILIZ.SALMOU:

18/2-3,4-5ab.....Levr T.p.93  
 24/4-5ab,6-7,8-9,10,14.....Levr.C.p.2  
 26/ 1-2,3,5... Levr A.p.52  
 95/ 1-2a, 2b,3, 7-8a,9-10a.....Levr A.p.109  
 97/1-2, 3-4,5-6 ... Levr T.p.9  
 109/1,2,3,4 ... Levr C.p.42  
 116/ 1-2 /... Levr C.p.60  
 122/ 1-2a, 2bcd ... Levr B.p.71

AN AVIEL.

1- MAZE 16/13-19 ... Levr A.p.94  
 Alleluia...Levr A.p.94  
 2-MAZE 18/15-20 ... Levr A.p.98  
 Alleluia.. Levr T.p.66...Efes...1/17-18  
 3-MAZE 28/ 16-20... Levr A.P,51  
 Alleluia.. Levr A.p.51...Mz...28/19-20  
 4-Yann 15/1-8 ... Levr B;P;37  
 Alleluia...Levr B.p.37 .....Yn...15/3-4  
 5-YANN 17/ 11 b,17-23:

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad,  
 Jezuz a bedas evelhern evid e ziskibien  
 11- "Tad santel, mirit dre koh ano-hwi,  
 ar re-mañ ho-peus roet din,  
 evid ma vezint unan, evel ma'z om-ni.  
 17- Grit ma vint gouestlet deoh dre ar wirionez;  
 Gwirionez eo ho komz-hwi.  
 18- Evel m'ho-peus kaset ahanon da zond er bed,  
 me, d'an zro, am-eus o haset er bed.  
 19- Hag evito, en em ouestlan deoh,  
 evid ma vont d'o zro gouestlet deoh e gwirionez.  
 20- N'eo ket hebken evid an diskibien a zo amañ emañ o pedi  
 med ivez evid ar re o devo feiz ennon diwar o lavar  
 21- Grit ma vezint oll unan hebken  
 evel m'emaoh-hwi Tad ennon ha me ennon  
 grit dezo beza unan hebken ennon  
 evid ma kred ar bed eo ganeoh ez on bet kaset.  
 22-A Ar hloar am-eus het diganeoh, am-eus roet dezo,  
 evid ma vint unan hebken, evel ma'z om-ni- unan.  
 23- Me enno, ha c'hwi ennon  
 evid ma vint unan da vad  
 ha ma ouezo ar bed eo ganeoh ez on bet kaset,  
 hag ho-peus ho haret, evel m'ho-peus va haret-me.

6- Yann 21/ 15-17... Levr T.p.95.

OVERENNOU.

EVID BREURIEZ AR FEIZ (AR MISSIONOU)

A- "DEUS MISEREATUR NOSTRI"

Kan an digor: (Salm 66/2-3)

*Plijet gand Doue skuill warnom  
e drugarez hag e vennoz  
ha diskouez deom dremm laouen;  
ma hellim rei da anaoud dre ar bed ho lezenn zantel  
hag e-touez an oll boblou ho silvidigez.*

Pedenn an digor:

*Aotrou Doue,  
c'hwi hag a fell deoh e vefe salvet an oll dud  
ha ma teufent da anaoud ar wirionez,  
grit eur zell ouz hoh eost puill  
ha plijet ganeoh kas eosterien niveruz;  
evid ma vo prezeget an Aviel d'an oll,  
ha ma teuy ho pobl, dastumet dre gomz ar vuez,  
ha sikouret gand nerz ho sakramañchou,  
da gerzed war hent ar zilvidigez hag ar garantez.  
Dre Jezuz Krist ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.*

pe: *Aotrou Doue,  
C'hwi ho-peus kaset er bed ho mab, ar gwir sklerijenn,  
skuillit ar Spered ho-peus prometet  
a zil dalc'hmad hadenn ar wirionez  
e kalon an dud hag o doug d'ar feiz,  
evid ma veritfent oll  
ganet d'ar vuez nevez dre ar vadiziant,  
dond da veza lod euz ho pobl.  
Dre or Zalver Jezuz Krist.....*

War ar provou:

*Taolit eur zell, Aotrou Doue,  
war zremm ho krist,  
hag a zo en em roet e-unan e sakrifis,  
evid prena an oll dud,  
evid ma vo drezañ kanet gloar d'hoh ano,  
euz ar zav-heol d'ar huz-heol, e-touez an oll boblou  
ha ma vo kinniget e peb leh d'ho majesté  
ar brovadenn n'eus nemeti.  
Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.*

Antivonenn d'ar gomunion: (Maze 28/20-)

Deskit d'an oll boblou

miret kement am-neus gourhemennet deoh, eme an Aotrou,  
ha setu m'emaon ganeoh 'hed an oll deizioù  
beteg fin ar bed.

Goude ar gomunion:

Maget bremañ gand ar zakramant e-neus on dasprenet

e teuom d'ho pedi, Aotrou,

grit ma 'z ay bepred war araog ar feiz,

e -touez an oll boblou dre ar bed a-bez,

Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.

o+o+o+o+o+o+o+o+o+

## B- " ANNUNTIATE INTER GENTES"

Kan an digor: (Salm 95/3-4)

Grit brud d'e hloar e-touez broadou an douar  
d'an oll boblou displegit e vursudou,  
rag braz eo an Aotrou ha leun a hloar.

Pedenn an digor:

Aotrou Doue,

c'hwil hag a zo fellet ganeoh ober euz hoh Iliz  
ar zin euz ar silvidigez a zigasit d'ar bed  
evid ma talho labour or zalver da vond war araog  
beteg fin an amzeriou;  
Deuit da vrouda kalonou ho tud fidel  
evid ma teufent da anaoud ez int galvet  
da labourad evid silvidigez an oll dud  
ma teuy an oll boblou da veza  
mitch mui unanet ha mitch mui niveruz.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou  
Doue beo ganeog ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken. Amen.

War ar provou:

Aotrou Doue,

grit ma savo dirag ho meurded  
ar pezh a ginnig deoh hoh Iliz ouz ho pedi:  
pasion gloriuz ho mab  
evid silvidigez ar bed a-bez.  
Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.

Antivonenn d'ar gomunion:

Oll boblou ar bed, meulit an Aotrou,  
meulit e ano oll vroioù ar bed,  
stard eo e garantez evidom  
hag e wirionez a bad da viken.

Goude ar gomunion:

It dre ar bed a-bez, eme Jezuz,  
embannit kelou mad an Aviel d'an oll dud.

Ar perz on-eus kemeret en ho pred santel, Aotrou,  
ra zeuio d'or zantellaad, ni ho ped;  
peogwir e-neus ho mab unik savetset ar bed  
en eur zevel war ar groaz,  
grit ma vo an Iliz evid an oll dud  
ar zin hag an hent euz o silvidigez.

Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.

oooooooooooooooooooo

EVID BRE-RIEZ AR FEIZ.

Lennadennou.

(er mêz euz an amzer Fask)

1-Iz. 2/1-5

An Aotrou a zastumo an oll boblou en e rouantelez,  
dezo da gaoud eur peoh peurbaduz.

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz:

*Gweled Levr A.p.5*

2-Iz. 56/1,6-7:

"Va zi, eme an aotrou, a vo grêt anezañ:  
ti ar bedenn evid an oll boblou."

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz.

*Gweled levr A.p.92*

3-Iz. 60/1-6:

Warzu da sklerijenn e kerzo an oll boblou.

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz/

*Gweled levr. T.p.19*

4-Jonaz. 3/ 10-4/11

Karantez Doue evid ar bayaned.

Lennadenn euz levr ar profed Jonaz:

3/10 O weled penaoz e troe kein tud Niniv, d'o buez fall,  
Doue a zavas keuz gantañ,  
d'an droug e-noa lavaret e raje dezo,  
hag e chomas heb hen ober.

4/1 Jonaz a gavas diêz kenañ hag e yeas en egar

2 Pedi a reas an Aotrou evelhenn:

"Ah ! Aotrou, ha n'eo ket an dra-ze a lavaren ermon va unan  
p'edon war va douar !

setu perag ez eus bet mall ganin tehed da Darsiz.

Gouzoud a reant awalh

ez oh eun Doue a drugarez hag a vadelez

difoun da vond e kounnar

atao fidel ha prest da bardoni.

3- Bremañ, Aotrou, lammit va buez diganin

rag gwelloc'h eo evidon ar maro eged ar vuez.

4- An Aotrou a lavaras:

"Daoust ha mad a rez, mond e kounnar ?

5- Jonaz a yeas ar mêz euz kêr

diouz kostez ar zav-heol;

sevel a reas eno eul locheñn hag azeza enni en disheol,  
evid gweled petra 'zigouezfe e kêr.

- 6- An Aotrou a lakeas da zevel eun iliavenn,  
a zavas a-uz da Jonaz,  
evid ma vefe disheol warnañ  
ha ma vefe dizammet euz e boan;  
Pitjadur braz a reas an iliavenn da Jonaz.
- 7 Antronoz, da houlou-deiz, e kas an Aotrou eur preñv  
hag a dagas ar blantenn,  
houmañ a zizehas.
- 8 D'ar zav-heol, an Aotrou a lakeas da houeza  
eun avel reter tomm-bero  
hag an heol a skoas war benn Jonaz.  
Dare da fatika e houlennas mervel:  
"Gwelloc'h eo ar maro evidon eged ar vuez" emezañ.  
Doue a lavaras dezañ:  
"daoust ha mad a rez mond en egar  
ablamour d'an iliavenn?"  
"Ya, emezañ, mad a ran mond en egar beteg mervel."
- 10 An Aotrou a lavaras dezañ:  
"Te az-peus bet truez ouz an iliavenn,  
eur blantenn ha n'az-peus kemeret poan ebed ganti,  
ha n'az-peus ket laketa da greski,  
hag a zo savet en eun nozvez,  
hag eun eun nozvez a zo marvet,
- 11 ha me neuze, n'am-befe ket truez ouz kêr Niniv,  
ar gêr vraz a zo enni c'hweh-ugentmil den,  
ha n'ouzont ket diouz o diou hag o hleiz,  
hag ouspenn kalz a loened."

#### 5-Zakariaz 8/20-23:

Poblou niveruz a deuo da Jeruzalem  
da bedi Doue, mestr ar Bed.

Lennadenn euz levr ar profed Zakariaz:

- 20 Evelhen e komz an Aotrou mestr ar bed  
"ya, gweled e vo c'hoaz o tireded stank  
pobladoù ha tud euz ar hêriou braz
- 21 Hag euz eur gêr d'eben e lavaro an dud an eil d'egile:  
"Deom da bedi an Aotrou,  
deom da glask an Aotrou, an Oll Halloudeg,  
me da vianna a zo o vond."
- 22 Poblou niveruz ha pobladoù gallouduz  
a zeuio da Jeruzalem  
da glask an Aotrou, an oll-Halloudeg  
ha da bedi an Aotrou.
- 23 Evelhen e komz an Aotrou, Oll-halloudeg:  
"en amzer-se evid eur Yuzeo  
e vo deg den, a beb yez komzet gand ar broadou,  
o tond da gregi ennañ dre e wiskamant, en eur lavared:  
ni'fell deom mond ganeoh,  
rag henn klevet on-eus: Doue a zo ganeoh."

Lennadennou (en Amzer Fask)

1-OBEROU 1/3-8

C'hwi a vo testou din, beteg pennou pella ar bed.

Lennadenn euz levr oberou an Ebestel:

*Gweled levr T.p. 65.*

2-OBEROU 11/19-26:

Mond a ree ivez an Ebestel daved ar Hresianed  
da embann dezo ar helou mad digaset gand Jezuz.

Lennadenn euz Levr Oberou an Ebestel:

- 19 Ar re a oa bet strewet warlerh ar freuz  
savet diwarbenn Stevan  
a oa eet beteg ar Finisi, Chipr hag Antioch  
heb prezeg ar gomz da zen, nemed d'ar Yuzevien.
- 20 Hiniennou anezo koulskoude  
ginidig euz Chipr pe Siren,  
en em gavet e Antioch, a yeas d'ar Hresianed  
da embann dezo kelou mad an Aotrou Jezuz.
- 21 An Aotrou a roe skoazell dezo,  
ha setu ma oa braz niver an dud  
a zeus da gredi ha da drei ouz an Aotrou.
- 22 Ano a gement-se a erruas beteg Iliz Jeruzalem  
hag e oe kaset Barnabaz da Antioch.
- 23 Pa zigouezas ha pa welas frouez ar hras roet gand Doue  
e oe laouen hag e poanias warno  
da jom stard a galon, fidel d'an Aotrou.
- 24 Eñ, e-unan a oa eun den eeun  
karget euz ar Spered Santel ha leun a feiz.  
Eun niver braz a dud a zeuas evel-se da gredi en Aotrou.
- 25 Barnabaz a yeas neuze da Darz da gerhad Saül.
- 26 E gavoud a reas hag e tigasas anezañ da Antioch.  
A hed eur bloavez penn da benn e chomjont en Iliz-se  
ha kelenn a rajont eun niver braz a dud  
Hag e Antioch eo e oe roet evid ar wech kenta  
an ano a "gristenien" d'an diskibien.

3-OBEROU 13/46-49:

Paol ha Barnabaz, resevet fall gand ar Yuzevien;  
a dro warzu ar bayaned.

Lennadenn euz levr Oberou an Ebestel:

*Gweled ar Bastored. K.43 p.122*

AR SALMOU.SALM 18/2-3,4-5:

Diskan: *Dre ar bed a-bez  
eo bet klevet o mouez !*

Ar Salm: Levr T.p.93

SALM 95/1-2a,2b-3, 7-8a,9-10a:

Diskan: *Grit brud, e-touez an oll boblou  
d'an traou kaer e-neus grêt an Aotrou.*

Ar Salm: Levr A.p.109

SALM 97/1,2-3ab, 3c-4, 5,6:

Diskan: *An douar a-bez e-neus gwelet  
ar Zalver roet deom gand Doue.*

- 1- *Savit d'an aotrou eur han nevez,  
rag burzudou dispar e-neus grêt.  
Diwar e zorn nersuz hag e vreh santel  
eo deuet dezafñ an treh.*
- 2- *An Aotrou e-neus roet da anaoud e zilvidigez  
a wel da vroadou an douar e-neus diskouezet e justis,*
- 3ab *Dalhet e-neus sonj euz e vadelez e-keñver Israel  
hag euz gwirionez e bromesa.*
- 3c *Beteg penmau pella an douar,  
eo bet gwelet zilvidigez on Doue.*
- 4 *Savit ho mouez en enor d'an Aotrou, oll boblou ar bed.  
Bezit laouen ha kanit a wir galon.*
- 5- *Sonit d'an Aotrou war an delen,  
war an delen ha gand son ar musikou.*
- 6 *Gand trompillha son ar horn boud,  
kanit meuleudi d'ar roue an Aotrou.*

SALM 66/2-3,5;7-8:

Diskan: *Ra gano ar poblou ho meuleudi, Aotrou.  
Ra gano an oll boblou ho meuleudi.*

Ar Salm: levr T;P.14. Ar Briedelez p.37

K.p.160

SALM 116/1-2:

Diskan: *It dre ar bed a-bez da brezeg an Avel.*

Ar Salm Levr C. p. 60 pe 84

## BREURIEZ AR FEIZ. (Kendalh)

Eil lennadenn.1-Rom. 10/9-18:

An Aviel embannet dre ar bed a-bez.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'ar Romaned:

- 9- Va breudeur, petra' lavar ar Skritur ?  
 gand ma tisklerio da vuzellou eo Jezuz Krist an aotrou  
 ha ma kredi en da galon  
 e-neus Doue savet anezañ a-douez ar re varo,  
 e vezi salvet.
- 10 Rag, dre gredi, a wir galon, e vezer lakeet e stad a hras  
 ha dre ziskleria ar feiz a henou  
 ez eer d'ar zilvidigez.
- 11 Daoust ha ne lavar ket ar skritur:  
 kement hini e-neus feiz ennañ, n'e-no ket kerse
- 12 N'eus eta kenm ebed etre ar Yuzeo ha tud ar poblou all  
 rag oll o-deus an heveleb Aotrou,  
 brokuz e kenver an oll dud en em erbed outañ.
- 13 Rag skrivet eo:  
 kement hini en em erbed ouz an aotrou a vo salvet
- 14 Med penaoz pedi anezañ,  
 ma ne greder ket c'hoaz ennañ ?  
 ha penaoz kredi ennañ heb beza klevet e gomz  
 ha penaoz klevet e gomz  
 ma n'eus den ebed oh embann anezi ?
- 15 Ha penaoz embann heb beza kaset,  
 hervez ma lavar ar Skritur Za<sup>kr</sup> :  
 "-na kaer eo treid embannerien ar helou mad !"
- 16 Ha koulskoude, n'eo ket an oll o-deus sentet  
 ouz ar Helou Mad,  
 Izaiaz a lavare:  
 "-Aotrou, piou e-neus kredet ouz or hlevet ?"
- 17- Neuze 'ta, e teu ar feiz diwar ar prezegerezh,  
 hag ar prezegerezh a zo komz an Aotrou Krist.
- 18 Med hen goulenn a ran:  
 daoust ha n'o-deus ket klevet ?...Eo sur !  
 hekleo o mouez 'zo en em strewet dre an douar a-bez  
 Hag o homzou beteg pennou pella ar bed.

2-EFEZ 3/2-12

Ar bayaned o-unan o-deus perz er memez herez.

Lennadenn euz lizer Sant Paol da gristenien Kêr-Efez:

- 2 Va breudeur,  
anaoud a rit ar hras a zo bet roet din evidoh,
- 3 Penaoz eo bet dizoloet din  
e vennoz kuz, diwarbenn an Aotrou Krist  
ar-deus e berr gomzou displeget deoh.
- 4 O lenn ar homzou-se e hellit intent  
an anaoudegez am-eus euz mister ar Hrist
- 5 N'eo ket bet diskuliet d'an dud en amzeriou tremenet  
evel m'eo bet diskuliet bremañ dre ar Spered  
d'e Ebestel ha d'e profeted santel.
- 6 Dre an Aviel eo deuet ar bayaned  
da gaoud lod er memez korv  
da veza izili euz ar memez korv  
ha lodeg er bromesa grêt gand Doue,  
en Aotrou Krist, dre brezegerezh an Aviel.
- 7 An Aviel-se, on deuet da veza ar ministr anezañ  
dre zonezon gras Doue  
a zo bet roet din dre nerz e halloud
- 8 Me, an disterra e-touez ar zent;  
a zo bet roet din ar hras-se:  
prezeg d'ar bayaned pinvidigezh divuzul ar Hrist.
- 9 Roet eo bet din ar hras-se da lakaad er sklerijenn dirag an oll  
ar pezh a zo er mister(chomet)kuzet a oll viskoaz  
e Doue, krouer peb tra.
- 10 Evelse ar galloudezhioù kuzet o-unan  
o-do anaoudegez dre labour an Iliz  
euz liez doareoù farnes Doue.
- 11 Ar mennad-se e-noa divizet Doue a oll viskoaz  
evid e gas da benn en Aotrou Krist
- 12 Hag or feiz en Aotrou Krist eo a ra deom  
kredi tostaad ouz Doue gand fiziañs.

oooooooooooooooooooo

AN AVIEL.

1-MAZE 28/16-20:

Alleluia Alleluia ! Mz 28/19-20  
 It en hent,  
 euz an oll vroadou, grit diskibien din !  
 Ha setu, emañ ganeoh, hed an oll deizioù  
 beteg fin ar bed. Alleluia !

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze:

*Gweled levr A;P.51 + Ofis an Doktored hag ar Bastored.*

2-MARK 16/15-20:

Alleluia Alleluia Mk. 16/15  
 It dre ar bed a-bez, eme ar Zalver  
 Embannit kelou mad an Aviel d'an oll dud. Alleluia !

Aviel Jezuz Krist Hervez Sant Mark:

*Gweled levr B.p. 39 ; hag ivez ofis ar Bastored.*

3-LUKAZ 24/44-53:

Alleluia Alleluia Yn.3/16  
 Ker braz eo bet karantez Doue evid ar bed,  
 ma 'neus roet e vab unganet  
 evid m'e-no ar vuez peurbeduz  
 kement den e-neus feiz ennañ. Alleluia !

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz:

44 Jezuz savet da veo, en em ziskouezet  
 d'e ziskibien, a lavaras dezo:  
*"Dalhit soñj er homzou-mañ,  
 am-eus bet lavaret deoh p'edon c'hoaz en ho touez:  
 e ranke dond da wir kement a ze skrivet diwar va 'fenn  
 e lezenn Voizes, er Brofeted hag er Salmou."*

45 Neuze e tigor dezo o spered da intent ar skrituriou.

46 Hag e lavar dezo:  
*"Evelse eo merket er Skritur Zakr e tle ar Zalver,  
 gouzañ ar maro ha sevel a varo da veo d'an trede deiz,*

47 *hag e tle ar binijenn beza prezeget en e ano  
 d'an oll boblou, ha da genta e kêr Jeruzalem  
 evid pardon ar pehejou.*

- 48 C'hwi eo a zo lakeet da dest euz a gement-se  
 49 Me a zigaso deoh promesa va Zad,  
 c'hwi, chomit e kêr da hortoz ma vo deuet deoh  
 eun nerz euz an neñv.  
 50 Jezuz neuze, a gasas anezo d'e heul  
 beteg tost da Vetani  
 savet gantañ e zacuarn, e vennigas anezo,  
 51 Hag epad ma roe dezo e vennoz  
 e pellas diouto, hag e oe douget d'an neñv.  
 52 An diskibien; goude beza stouet dirazañ,  
 a zistroas da Jeruzalem, levenez vraz en o halon.  
 53 Dalhmad e vezent en templ, o veuli Doue.

## 4-YANN 11/45-52:

Alleluia, Alleluia

Mk.3./16

It dre ar bed a vez ,eme or Zalver  
 embannit kelou mad an Aviel d'an oll dud. Alleluia !

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann:

- 45 Kalz euz ar Juevien a oa deuet da gavoud Mari,  
 hag o-doa gwelet ar pezh e-noa grêt Jezuz,  
 a gredas ennañ.  
 46 Med hiniennou a yeas da gavoud ar Farizianed  
 hag a gontas dezo petra e-noa greet Jezuz.  
 47 Ar veleien-vraz hag ar Farizianed  
 a vodas ar huzul-meur  
 hag a lavaras! Petra 'reom,  
 rag an den-se a ra kalz burzudou ?  
 48 Ma lezom anezañ da gendelher evel-se  
 e kredo an oll ennañ  
 hag e teuy ar Romaned da zistruja  
 hag on leh santel hag or broad.  
 49 Unan anezo, Kaifaz, hag a oa beleg braz er bloavez-se  
 a lavaras dezo: "C'hwi, ne intentit netra,  
 50 ne zoñjit ket eo gwelloc'h deoh  
 e varufe eun hebken evid ar bobl,  
 ha ne'z afe ket da goll ar vroad a-bez ?  
 51 N'eo ket anezañ e-unan e lavaras kement-se,  
 med, o veza m'oa beleg braz er bloavez-se,  
 e profedas e ranke Jezuz mervel evid ar vroad  
 52 ha n'eo ket hebken evid ar vroad  
 med evid dastum en unan  
 bugale Doue strewet amañ hag ahort.  
 53 Adaleg an dervez-se e tivizjont e lakaad d'ar maro.

5- YANN 17/ 11b, 17-23:

Alleluia Alleluia

Yann 3/15

Ker braz eo bet karantez Doue evid ar bed

m'e-neus roet e vab unganet

evid m'e-no ar vuez peurbaduz

kement den e-neus feiz ennañ. Alleluia !

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann:

Araog tremen euz ar bed-mañ daved e dad

e pedas Jezuz evelhern evid e ziskibien:

11 Tad Santel, mirit dre hoh ano

ar re-mañ ho-peus roet din

17 Grit ma vint gouestlet deoh dre ar wirionez

gwirionez eo ho komz-c'hwir.

18 Evel m'ho-peus kaset ahanon da zond er bed,

me, d'am zro, am-eus ho haset er bed.

19 Hag evito, en em ouestlan deoh,

evid ma vint d'o zro gouestlet deoh e gwirionez.

20 N'eo ket hebken, evid an diskibien a zo amañ,

emaon o pedi, med ivez evid ar re o-devo feiz ennon  
diwar o lavar.

21 Grit ma vezint oll, unan hebken,

evel m'emaoh-c'hwir, tad, ennon-me ha me ennoh,

grit dezo beza unan hebken ennom,

evid ma kredo ar bed ez eo ganeoh on bet kaset.

22 Ar hloar am-eus bet diganeoh, am-eus roet dezo,

evid ma vint unan hebken, evel ma'z om-ni unan,

23 me enno, ha c'hwir ennon, evid ma vint unanet da vad

ha ma ouezo ar bed eo ganeoh on bet kaset,

hag ho-peus o haret evel m'ho-peus va haret-me...

oooooooooooooooo

PATER HAG AVE KOSA E BREZONEG.

Kavoud a reom anezo moarvad el levr: "HEURYOU BREZONEK HA LATIN"  
Gilles de KERAMPUILL, embannet wardro 1568.

"PAX" kelaouenn abbati LANDEVENNEG e-neus komzet anezo en  
niverennou 42 (Ebrel 1960) ha 82 (Ebrel 1970). Aze eo on-eus  
kavet an destenn a embannom amañ warlerh. N'eo ket eun droidi-  
gez striz, med laosk euz or pedennou.

(Bennoz Doue a lavarom d'an Tad GREGOIRE)

AN PATER EN BREZONEC FACILHAFU MAZ EU POSSIBL.

gant G. K.P.E.C

## PATER NOSTER QUI ES IN CELIS

Hon tat peheuny so en neffuou  
Roue ha crouer dâ holl madou,  
Digutenech hep sy ez dinou (1)  
An froez an hol madelezou. (2)

## SANTIFICETUR NOMEN TUUM

Bezef hoz hamu santifiet  
Dre quemment christen a so ganet.  
maz rentimp deoch enor, ha gloar  
Uez hon oll ober ha lavar.

## ADVENIAT REGNUM TUUM

Deuet deomp hel (3) hoz Roentelez  
Da hastafu hon siluidiguez  
rac an desir vez hoz joazou  
Eu a mag hon eneffuou.

## FIAT VOLUNTAS TUA SICUT IN CELO ET IN TERRA

Groet euel en neff var en douar  
Hoz puissanco bras: a so dispar  
Ni a suply en divez;  
Da vezo graet ho volonteiz (4)

## PANEM NOSTRUM QUOTIDIANUM DA NOBIS HODIE

Reit d'on corffou an bara materiel  
D'on eneffou an bara celestiel  
Hysiu her maz vizimp aman  
Ho corff precius eguit an guellhafu.

ET DIMITTE NOBIS DEBITA NOSTRA SICUT ET NOS DIMITTIMUS DEBITORIBUS NOSTRIS

Pardonet dimp hon pechedou,  
 Huy eu an tat a Trugarezou,  
 Euel' maz pardonomp da bishuiquê:  
 D'on' n'essafu ha d'on' dleouryen.

ET NE NOS INDUCAS IN TENTATIONEM

Ha non dilaes da vezout temptet,  
 Gant hon ezreuent (5) na faezet, (6)  
 Drê quic, drê bet, drê drouc speredou  
 Ni hoz suply hon guir autrou.

SED LIBERA NOS A MALO

Hoguen hô diliuret dre ho puissâcc  
 Uez hon oll anquen ha souffrance  
 A liammou hon aduersser:  
 Hon groet exempt e peb amzer.

AMEN JEZUZ

(1) Ez dinou = e tinaou = e tiskenn (mond war zinaou, warziskenn)

(2) "an" pour a'n: hag an

(5) ezruent = aerouant, pl. erevent = démons

(6) faezet = trehet

(3) hael = brokus

(4) "da": faute (typographique) possible pour "Ra"

oooooooooooooooooooo

ooooooo

AN AVE MARIA E BREZONEG.

AVE MARIA GRATIA PLENA

Me ho salut laouen a facz  
Mary, guerchez so leñ a grac  
En ho corff exempt a pechet,  
Ez vezo cōcepuet Saluer an bed.

DOMINUS TECUM

Nen deu quet dre humanitez (1)  
Ez eu gouarnet ho chastetez,  
An Autrou so certen guenez:  
Guerchez goude an guiniuelez.

BENEDICTA TU IN MULIERIBUS

Bezgraz da groec ne voe roet,  
An priuilegeou a heus bezet,  
Eurus out ha guiruizic: (2)  
Heruez an sp̄eret, ha heruez an quic.

ET BENEDICTUS FRUCTUS VENTRIS TUI

An froez a coff so benniguet,  
Jezuz map Doue Saluer an het,  
So disquēnet an nefu euel dē,  
Da reparifu natur humaen.

SANCTA MARIA MATER DEI ORA PRO NOBIS PECCATORIBUS. AME JESUS.

Santes Mary mamm da Doue  
Hon sicouret lem (3) en hon enoue,  
Pedet ho map, hon guir autrou,  
Da p̄donifu dimp hō pechedou. (4)

Amê.

(1) le z ne se prononçait pas.

(2) guiruizic = gwenvidig = bienheureux

(3) lem = buan

(4) p̄donifu = pardonifu; le p (barré) pour par comme K= kar ou ker.

ESSAI DE REDACTION EN ECRITURE MODERNE

AR BATER E BREZONEG FACILLAN MA'Z EO POSSUBL.

On Tad pehini 'zo en neñvou  
Roue ha Krouer d'an oll vadou  
Diganeoh heb si e tinaou  
Ar frouez, an oll vadelezou.

Bezef hoh ano santifiet  
Dre gement Kristen a zo ganet  
Ma rentim deoh enor ha gloar  
Euz on oll ober ha lavar.

Deuet deom hael ho Rouantelez  
Da hastañ on silvidigez  
Rag an desir deuz ho joiaioù  
Eo a vag on eneou.

Grit evel en neñv, war an douar:  
Ho puisañs vraz, a zo dispar  
Ni ho supli en diwez  
Da (=Ra) vezo greet ho polontez.

Roit d'on korvou ar bara materiel  
D'on eneou ar bara selestiel  
Hirio keid ha ma vezim amañ  
Ho korv presiuzevid ar gwellañ.

Pardonit dim or pehejou  
C'hwi eo an Tad a drugarezou,  
Evel ma pardonom da virviken  
D'on nesañ ha d'on dleourien.

Ha n'on diler da veza tentet  
Gand on erevent, na faezet  
Dre 'r hig, dre 'r bed, dre 'n droug sperejou  
Ni ho supli, or gwir aotrou.

Hogen, on dilivrit dre ho puisañs  
Euz an oll anken ha souffrañs,  
A liammou on adversour  
Or grit exempt e peb amzer.

Amen. Jezuz.

AN AVE MARIA E BREZONEG.

Me ho salud laouen a fas (1)  
 Mari, gwerhez 'zo leun a hras  
 En ho korv exempt a behed  
 E vezo konsevet Salver ar bed.

Ne deo ket dre humanite  
 Ez eo gouarnet ho chastete  
 An Aotrou a zo serten ganez  
 Gwerhez goude ar hinivelez

Biskoaz da wreg ne oe roet  
 Ar privilejou a heus bet  
 Euruz out ha gwenvidig:  
 Hervez ar spered hag hervez ar hig.

Ar frouez euz da gov 'zo benniget  
 Jezuz mab Doue, Salver ar Bed  
 Zo diskennet euz an neñv evel den,  
 Da reparañ natur humen.

Santez Mari, mamm da Zoue  
 Or sikourit lemm en on enoue (2)  
 Pedit ho mab, or gwir Aotrou,  
 Da bardoniñ dim or pehejou.

(1) A FAS (galleg: face)

(2) LEMM: buan.

oooooooooooooooooooo

oooooooooooo

oooo

QUELQUES NOTES PRESENTEES PAR F. FALC'HUN, Professeur de Celtique  
à l'Université de Bretagne Occidentale.

))))

Ces paraphrases du Pater et de l'Ave Maria en breton ont d'abord été publiées "d'après une copie de H. DE LA VILLE MARQUE, par WHITLEY STOKES, sous le titre de MIDDLE-BRETON HOURS à CALCUTTA en 1876, avec traduction anglaise et un glossaire -index où l'histoire de chaque son est sommairement étudié."

C'est ainsi que les présente Emile ERNAULT dans la REVUE CELTIQUE XLVII(1930), p. 127-130, avec quelques remarques, Joseph LOTH les avait déjà sélectionnées pour sa CHRESTOMATHIE BRETONNE( 1890) p. 254-256. De son côté, Henri LEWIS avait choisi AN PATER EN BREZONEC pour son manuel (en gallois) de moyen breton, LLAWLYFR LLYDAWEG-CANOL, Cardiff, 1935. Les deux textes appartiennent à la période du moyen-breton.

Le moyen-breton commence au 11ème siècle, à la fin de la période du vieux-breton, et s'étend jusqu'au milieu du 17ème siècle, exactement jusqu'en 1658, date à laquelle le SACRE COLLEGE DE JESUS, du Père MAUNOIR, à la fois catéchisme, grammaire et dictionnaire, ouvre la période du breton moderne. C'est une date évidemment conventionnelle, mais justifiée par l'abandon des vieilles graphies traditionnelles pour rapprocher l'orthographe de la langue parlée. Le véritable initiateur en ce domaine fut d'ailleurs Michel LE NOBLET<sup>7</sup>, dans un manuscrit breton daté de 1641, dont le Père MAUNOIR adopta dans ses publications les nouveaux principes orthographiques, parmi lesquels l'invention du c'h pour le distinguer désormais du ch restreint à sa valeur française (voir là dessus F. FALC'HUN, un texte breton inédit de Michel LE NOBLETZ dans les Annales de Bretagne (LVIV, 1957, P. 401-444)

Le moyen-breton n'avait pas plus d'unité dialectale que le breton moderne. Gilles de KERANPUIL écrivait à l'évêque de Cornouaille qu'il avait "traduit expressément (un petit catéchisme, celui du P. CANISIUS) pour l'usage du peuple de son diocèse." (R.C XLVII p.125). Il connaît les différences de parlers à l'intérieur de ce diocèse: "quand vous trouverez un astérisque avec *reper* à la marge, il s'agit des différents usages de mots de la langue bretonne, pour que celui qui ne saura pas l'un comprenne l'autre." (R.C XLV p.213).

Qui est Gilles de KERANPUIL ? "l'Abbé G. PONDAVEN a publié dans son bulletin ... d'Histoire et d'Archéologie (diocèse de Quimper et de Léon) Brest N° de Janvier-Février 1924, p.42-49) une importante étude sur Gilles de KERANPUIL qui mourut en 1578, "au moment où il venait d'être nommé à l'évêché de Vannes" et sur ses "Heures bretonnes" qu'il édita vers 1568" ( R.XLVp.202)

Recteur de CLEDEN POHER à deux petites lieues de Carhaix. l'auteur devait être natif de KERANPUIL en Plouguer, si l'on en croit son nom, car on ne connaît en Bretagne que cet unique KERANPUIL. Il avait donc pratiquement pour parler natal le breton de Carhaix. En cette ville, centre du réseau routier de la Basse Bretagne, se tenaient les plus grandes foires de la région où, à cette occasion, s'entendaient tous les dialectes. Le breton du Léon était alors en expansion; à cause de la prépondérance commerciale de Morlaix après celle de Landerneau, et du grand rayon d'action de ses marchands.

On peut donc s'attendre à trouver sous la plume de Gilles de KERANPUIL le breton de la région carhaisienne vers 1560, habillé à la mode orthographique du temps. En fait, c'est un breton assez hybride où se rencontrent des formes de tous les dialectes. (Mais il faut se dire que les frontières dialectales, mouvantes par nature, ont évolué depuis) des archaïsmes rappelant des tournures galloises, des réminiscences des mystères bretons antérieurs, et des calques des tournures françaises ou latines (ainsi la confusion entre l'interrogatif PEHINI et le pronom relatif), comme dans toute littérature de traduction de l'époque.

Voyons d'abord les particularités orthographiques. On sait que l'alphabet latin primitif ne distinguait pas entre U et V, entre I et J. Cette distinction est une innovation des premiers temps de l'imprimerie. Nos textes écrivent encore par U le V que nous prononçons dans giniVelez, gwenVidig (= bien-heureux, herVez, SalVer, eVel ,etc...)

Ils transcrivent par FF, FFU, ou FU un V résultant généralement de la mutation d'un ancien : FF ou FU en fin de mot marque seulement la nasalité de la voyelle précédente: claFF (catholican) = klañv. Exemples dans nos textes: neFF, neFFUou; eneFFou, eneFFUou, guellhaFU, nessaFU, hastaFU, repariFU, pardonifU. Ces quatre derniers mots correspondent aux infinitifs en añ et iñ du Tréguier, aujourd'hui bœufoulés dans la zone d'influence de Guingamp. Cependant, FF vaut F dans CorFF et coff.

On remarquera que le C'H du vieux KLT est toujours écrit CH dans guerchez, pechedou, diguenech, deoch, etc.... D'autres textes écrivent guerhes ce qui semble révéler un H doux. On comprend l'embarras des bretonnants de cette époque, s'ils savaient lire tout en ignorant le français, devant des mots comme chatal, ou chom. D'où l'idée de Michel LE NOBLETZ de transformer en C'H le vieux CH des mots bretons, pour le distinguer du CH des emprunts au français. Le Père MAUNOIR a généralisé le système, que le vannetais n'a pas adopté parce qu'il avait transformé en H le vieux CH breton.

Le tilde (ici transcrit par un accent circonflexe) marque un N prononcé après la voyelle: bizh<sup>u</sup>iquê (= birviken) rime avec dleourien. Voir aussi dâ= d'an; hô= hon; drê= dre '(a) n; leû= leun; disquênet=diskennet. Par contre, un N final écrit peut marquer simplement la nasalité de la voyelle précédente, tout comme FU: aman rime avec guellhafu (= gwellâ).

Le K est inconnu: C et G ne sont jamais durs devant I et E où l'on écrira donc QU et GU suivant les principes du français: guir, anquen, benniguet. Seul le contexte indique si GU vaut G, comme dans guenez, diguenech, ou GW comme dans guerchez. D'où aujourd'hui la graphie gwerhez, qui évite l'ambiguïté des signes GU; Ch et même C'H. Car une mauvaise orthographe finit par donner naissance à une mauvaise prononciation, comme le montre le français argü-er (en train de devenir arguer par analogie avec narguer, naviguer, etc...)

Le son OE ou EU s'écrit parfois UE (Uez= EUZ) comme souvent en vieux français, et aujourd'hui encore dans écueil, orgueil.

On observe un certain nombre de contradictions disparues du breton moderne et qui ressemblent à celles du gallois: AN pour HAGAN; A COFF pour A HA GOFF (euz da gov) L'article déterminé est toujours AN.

Remarquons enfin l'omission des mutations initiales, qui se faisaient pourtant dans la langue parlée: DRE QUEMMENT, A MAG; LEU A GRACZ; exempt A PECHED; da GROEC; DA DOUE; DA PARDONIFU (où Par est rendu par un P barré, à l'exemple du K barré valant CAR ou KER dans les noms de lieux.) Une exception cependant, comme par distraction: DA VEZOUT (da VEZA))

Cette dernière forme nous amène aux caractéristiques dialectales de notre texte. BEZOUT est une forme hybride, un mélange du BOUT barhaisien et du BEZA léonais

HOZ "votre" (aujourd'hui HOUS) et A (aujourd'hui HA) "ton" sont des possessifs vannetais. Mais le passage du vouvoiement au tutoiement dans le même texte est typique d'une assez vaste région autour de Carhaix. Dans notre PATER, NON DILAES "ne nous laisse pas" est au singulier, quand les autres impératifs de la deuxième personne sont au pluriel: GROET; REIT; PARDONET; DILIURET

A l'exception de REIT (=ROIT), ces impératifs sont en ET et de même ceux de l'AVE MARIA: SICOURET; PEDET: c'est l'usage de l'ensemble du domaine bretonnant, à l'exception du Léon et d'une étroite bande voisine en Cornouaille, où l'impératif est en IT

On constate encore un mélange de dialectes dans les désinences des pronoms personnels conjugués: GUENEZ (=GANES); DEOMP et DÉOCH sont léonais; DIMP trégorrois et haut-Cornouaillais; DIGUENECH se dit de Carhaix à Lannion. GROEC et GROET sont trégorrois et cornouaillais par leur O: le Léon dit GREG et GRIT. Mais c'est le E de REIT qui est cornouaillais: le Léon dit ROIT.

A un détail, on devine que l'auteur avait lu les mystères bretons des générations antérieures: on trouve chez lui ces chevilles ou mots bouche-trou qui n'avaient souvent d'autre justification que de procurer le nombre voulu de syllabes ou une rime intérieure: HEP SY; HEL; CERTEN; LEM.

Son breton, farci de mots français, donne sans doute une image bien infidèle de la langue populaire de l'époque. Mais, habillé d'une orthographe moderne, il nous reste aussi accessible que le français de Montaigne ou de Ronsard, ses contemporains.

F. FALC'HUN.

## BUEZ AR ZENT.

A-E SKEUD HA WAR ROUDOU DOM MIKAEL AN NOBLETZ..... 1<sup>o</sup>) AN TAD QUINTIN.

Lidet on-eus e Plouguerne er blâ-mañ (1977) gouelioù kantved abaoe m'eo bet ganet Dom Mikael e maner Kerodern e Plouguerne d'an 29 a viz here 1577. Diwezatoù, ni a gomzo anezañ.

Hirio e fell deom komz euz hiniennou euz ar re o-deus kenlabouret gant Dom Mikael pe o-deus kendalhet gant e labour a visioner e Breiz, ha da genta euz an hini a zo bet, alies, evel teod Dom Mikael, an hini a brezege epad ma rea Dom Mikael katekiz, evel ma ray diwezatoù person santel Arz; an Tad Quintin euz urz Sant Dominik, eul lean euz kouent ar Jakobined e Montroulez.

Ar gouent-mañ a zo bet evid or horn-pro, evel eun tour-tan da rei sklerijenn ar feiz ha diskouez hent ar santelezh da Vreiziz. Eur sklerijenn hag he-deus kendalhet da lugerni abaoe ar penn kenta betek an dispah vraz, epad eta tost da bemp kant vloaz: awechou muioù, awechou nebeutoù, gwir eo, hervez santelezh ar veneh.

Gwelom da genta istor ar gouent eo bet enni an Tad Quintin o vev.

KOUEM AR JACOBINED.

E touez an oll zent a zo bet en Iliz, abaoe donedigez ar Zalver, daou a zo euz ar re vrasa: Dominik ha Fransez a Asiz. Er memez amzer o-deus bevet o daou, euz ar memez oajou e oant; deuet e oant er bed e dibenn an daouzeg ved kantved ha beva o-deus grêt er penn kenta euz an trizegved kantved. Zoken, eur bloavezh int bet en em gavet asamblez, e Rom, hag eno en em weled hag en em gared evel breudeur.

An eil hag egile o-doa bodet endro dezo kalz diskibien. Peb hini evelse a zavas e urz ha pa varvont, o urzioù a oa dija skignet dre an Europ a-bez.

Breiz ne zaleas ket d'o digemeret. C'hweh bloaz goude maro Sant Fransez, e ziskibien o-doa kouent e Kemper. Diskibien Sant Dominik, d'o zro, ne zaleont ket da erruout e Breiz. Er bloavezh 1236 e errujont e Montroulez. Gouzoud a reom e peleh o-deus bevet, rag an iliz gaer o-doa savet, stag ouz ar gouent, a zo, hirio c'hoaz, an he zav; iliz ar Jakobined, eun ano roet ivez d'an Dominikaned ablamour d'ar gouent kenta o devoe savet e Bro-Hall, kouent sant Jakez, e Pariz.

Ar veneh kenta, nao anezo dioustu, a erruas e Montroulez d'an 29 a viz mezeven er bloavezh 1236. Azaleg neuze ar gouent a deuas da veza eur gestenn leun a wenann labourerezed, deuet, meur a hini anezo, da veza brudet en o amzer.

Pa errujont avad e Montroulez, ar veneh ne gavjont evito na ti na toenn. Meneh ar Relek o digemerhas en eun ti, e-pell diouz iliz Sant Melani, da hortoz ma vije savet ar gouent e verjez ha palez an duk, roet dezo, etre mogeriou kêr, ar stêr Jarlo ha karter ar winiennou. Marhad a oe grêt gand eun ijinour-tiez anvet Foukauld, a oa o chom e-Lanneur. War a zeblant, ne jomas ket al labouriou da stleja, rag er bloavezh 1250, e oe konsakret an iliz gaer hag en devez-se e oa kalz levenez e Montroulez.

N'eus ket leh da veza re zouezet o weled an Dominikaned erruet e Montroulez ken prim goude maro Sant Dominik. Hemañ e-unan a-deuas beteg Montroulez da weled an duk a Vreiz Per Mauklerk. Ar pab a gonte war an duk evid keme-red ar groaz a-eneb an Albijoaziz. Dominik a oa deuet da glask gounid anezañ. An duk, gwir eo, a reas skouarn vouzar. Med niveruz oa tud Montroulez hag o-doa sonj da veza gweled ar zant bras ha klevet anezañ o prezeg; a greiz kalon e tigemrijont e ziskibien.

#### GWENAN LABOUREREZED. deuet da veza brudet.

Ne gomzim amañ nemed euzteir anezo: Hervé Nedelek; Ewen Begcyon hag Yvon Mahyeuk.

#### HERVE NEDELEK:

Hervé Nédélec a oa ginidik euz a Vontroulez. Soñjal a reer e roas ar penn kenta euz e vuez a veleg da eskopti Treger. Eun den pinvidik e oa neuze, med trei a reas kein d'e beadra evid dond da veza manah e kouent kêr e gavel, er bloavezhioù kenta euz ar pewarzegved kantved. Goude eun nebeudig bloavezhioù tremenet er gouent e oa kaset da Bariz, da gouent Sant Jakez, evid ma vefe êsoh dezañ ober e studi. Er bloavezh 1307 pe 1308, e teuas da veza doktor war ar skianchou sakr.

M'ar doa digor e spered ez oa ivez eun den a benn hervez e gen-vreudeur. Dominikaned Bro Hall a zibabas anezañ evid o Zad priol, ha diwezatoù, er bloavezh 1318, e oe anvet da dad priol-meur an oll Dominikaned.

Hervez eur skrivagner koz ne fellas ket dezañ beza anvet da eskob na beza grêt kardinal; e'hoant e-noa gelloud kendelher da "aviela" an dud evel a vez lavaret bremañ.

Founmuz eo bet e labour a skrivagner, peogwir e lavarer, ar skridou deuet diwar e bluenn a zo ouspenn daou hant hanter kant anezo. Eñ eo e-neus embannet "Somme Théologique" Sant Thomas. Eñ ivez eo e-neus bet ar garg da ober kement a oa red evid lakaad Sant Thomas war roll ar zent, eul labour ha ne hell ket beza fiziet e "forz piou".

Mervel a reas evel eur zant e Narbon er bloavezh 1322, kant vloaz eta war lerh e vestr Sant Dominik. Eur wenarienn labourerez a lavarem, med deut da veza rouanez.

EVEN BEGAYON:

Setu amañ, en dro-mañ, eun eskob hag eur Hardinal euz kouent Montroulez.

Even pe Eozen a oa ginidik euz Plistin, mab oa da Yann Begayon ha da Gatarin Autret. Houmañ, a oa bet seizet<sup>ke</sup> izili, divreh ha divesker, e doug<sup>ke</sup> yaouankiz, med mond a reas da bardona war bez Sant Erwan, e Treger, er bloavez 1302, bloavez hent eün maro az zant, hag a oe pareet en eur zistrei d'ar gêr, hennez eo unan euz ar barzudou bet dalhet evid enrolli Erwan e-touez ar zent.

Evel Hervé Nedelek, yaouank c'hoaz; ez eas da vanah e kouent Montroulez. Eveldañ, ivez, e teuas da veza doktor war ar skianchou sakr. Ken brao ha mad ez eas e labour gantañ, ken lemm oa e spered, ma oe galvet gand ar pab Klement VI da zond davebañ evid beza pinijennour meur an Iliz. Anvet oe da eskob Treg ha da guzulier evid an duk Charlez Bleiz er bloavez 1362.

Eñ eo a vennigas ar mên kenta euz iliz ar Voger e Montroulez d'ar 15 a viz eost 1366. Ar Pab Urban V an hini a guiteas Avignon evid distrei da Rom, a reas eur hardinal anezañ. Dilezel a reas e garg a eskob Treger evid mond, eñ ivez, da Rom, eleh ma varvas er bloavez 1378. Beziet eo bet e iliz ar Minerv e Rom.

YVON MAHYEUK, eskob ROAZON (1462 - 1541)

An eskob santel-mañ a zo en em gavet gantañ evel gand Mikel An Nobletz ha kalz tud santel all euz a Vreiz, evel Nikolazig, Keriolet, Y.V.Lamenais h.a. Kemeret o doa an hent da veza enrollet etouez ar zent, med n'int ket êt da benn... e poent a deuo ? ...Marteze.

Yvon Mahyeuk a oa euz a Blouvorn e Bro Leon. E dud dezañ a oa marhadourien pinvidig; Kaset e oe da ober e studi da Gastell-Paol. Epad e studi e plije dezañ mond da weled an tadou karmez, o-doa kouent en traoñ da gêr, abaoe ar bloavez 1353. E-touez an tadou ez oa tud desket, anaoud a reom ano meur a hini anezo: Y. Guyomarc'h, Y. Goffig, Nouel Tanguy, Y. Guizur h.a. Marteze ez oant ivez kelennerien er skolaj, lod anezo da vianna.

Pa falvezas da Yvon mond da vanah, n'eo ket koulskoude war dor kouent an tadou karmez eo ez eas da skei, goulen a reas dor zigor digand ar Jakobined e Montroulez, gwir eo, Yvon a oa kelenner en eur famill e Montroulez, bloaz a oa; med moarvad ivez, ar paotr<sup>^</sup> yaouank, bloaz warnugent e-noa, a oa o klask eur vuez a binijenn. Ha gouzoud a rea o-devoa meneh Montroulez divizet er bloavez 1481 trei kein d'ar vuez eas ha pinvidig oa deuet da veza o hini, evid kemered a-nevez eur vuez striz ha paour evel m'oa bet buez an Dominikaned er penn kenta euz o urz.

Kaset e oe da ober e studi d'an Naoned, hag er bloavezh 1489, e kavom anezañ e Roazon, karget da goves an dud e iliz Itron Varia Ar Helou Mad, da hedat beza dibabet gand Anna a Vreiz evid beza he zad kovesour, ha diwezatoñ kovesour ar roue e-unan: Charles VIII.

Red e oe dezañ heuill ar roue hag ar rouanez; hag ez eas da Bariz, da gouent Sant Jakez. Med ar rouanez, c'hoant dezi da gaoud e peb eskobti, eun eskob euz an dibab a ginnigas, evel ma veze grêt d'ar mare, ober anezañ eskob Roazon; ar pezh a oe grêt es desped da Yvon, ne asantas beza eskob nemed evid senti ouz e Briol-Meur. (1507)

E Roazon, an eskob a vevas evel er gouent, ken paour, ken pinijennus, ken troet d'ar bedenn eged diagent. Yun a rea, azaleg gouel ar groaz e miz gwengolo beteg Pask. Pa deuas ar vosem da skei e kêr Roazon, e oe gwelet o vond hag o tond da zikour ar re glañv. Ober a reas euz e di eur skol da zeski micherieu d'an dud paour; deski dezo guriad, beza kereour ha kalz micherieu all. Eñ eo a gurunas, en e iliz-Veur, Fransez III, diweza duk a Vreiz.

An eskob santel a varvas d'an 20 a viz gwengolo, er bloavezh 1541, d'an oad a 79. Beziet eo bet e iliz veur Roazon, med kollet eo bet e relegou a zo bet kemmesket gand kalz relegou all. Er penn diweza euz ar seitegved kantved ez eus bet klasket ober ar pezh a oa red evid e lakaad war roll ar zent. Med trubuilhou an dispah vraz o-doa stanket outañ an hent. Ha bremañ, siwaz, n'eus ket kalz a ano anezañ nag e Roazon nag e eskobti Kemper ha Leon. E Plouvorn koulskoude eo kizellet e ano war voger iliz e gavel.

Plijet gand Doue e kavje Yvon Mahyeuk, kalz a dud da vale war e roudou, anezo marteze eo he-deus ezomm an Iliz en on amzer.

oooooooooooooooooooo

ooooo

Da gendelher  
F.E.